

# AR C'HI DU

Andantino      Mètr. J. = 96

Di-chul o vont d'an o-fe-reñ med ar chi  
 du'n poud an di-en, oh! oh! ton-la-di-ton-la-di. oh!  
 oh! ton-la-di-do —

Disul o vont d'an oferen,  
 'Lam ar c'hi du 'n poud an dien (1).

## DISKAN

Oh ! Oh ! Ton la di, ton la di,  
 Oh ! Oh ! Ton la di do !

Ar mevel 'lare d'ar vatez :  
 « Krog en e lost, tenn-han er-mez.  
 » Krog en e lost ha lip e benn,  
 » Rag pec' hed eo koll an dien.  
 » Ar c'hi-man zo disket ganin  
 » Gwalc'hi loaiou ha skudili (2).

(1) *Dien a ve laret e Bro-Leon hag e Kerne-Izel e lec'h koaven.*

(2) *Skudili e lec'h skudelou.*

*Serel ne zao kreiz al loarzi  
Gant frank e lont hen skub an ti*

» Kas al loueion bihan er-mez,  
» Ha digelienna ar vatez.

» Hag ober eun dra c'hoaz ouspen :  
» Monet d'ar ster gant lianen. » —

An oac'h, o vont d'ar c'hardi-forn,  
Eur gontel vraz gantan 'n e zorn.

'N hini 'n euz c'hoant da gaout cher vad,  
N'an neuz 'met donet d'ar Foload.

Eno 'kavo da zijuni  
Eur pladad mad a stripou ki.

Ar verc'h Helen a ouele dru,  
Gant ar c'heuz braz d'he c'hiik du.

— « Tevet, ma merc'h, na ouelit ket !  
» Chao du a-walc'h a vo kavet.

» Chas du a-walc'h a vo kavet,  
» Mez ken disket ne vez ket ! » —

*Dastumet gant an abad Guilherm.*